

Rouedad ar Stalioù Kan / Réseau des Ateliers de Chant
Ragtres "KANT A GAN!!!" / Projet "CENT CHANTENT!!!"
Nevez Amzer Kastell 'Ne 2017 / Printemps de Châteauneuf 2017

SON AN AMERIK

Bremañ p'emañ deut ar goañv ya dister al labourioù
'vit tremen ma zamm amzer 'c'han da gompoz sonioù

Me n'on ket pab na beleg ken nebeut skrivañgnour
Ma vankañ da resita me ho ped d'am jikour

Evit disklaeriañ dirazoc'h 'r pezh zo 'barzh ma spered
Deus ar sklaerañ ma c'hellin evit bezañ komprenet

Dimeus paotred Breizh Izel 'kao Jean deoc'h hirio
Pere zo deut d'an Amerik 'vit gounit dollarioù

Na kuiteet 'm eus Breizh Izel ar c'hae rañ bro 'zo war 'bed
'vit beviñ gant esperañs i tont c'hoazh d'he gwellet

Na kuiteet am eus Speied 'vit ur pennadig amzer
Evit bezañ eürusoc'h 'benn distroin d'ar gêr

Mes kaled eo ar vuhez en amzer zo bremañ
Ar bevañs a zo ken ker, dister ar baemant

Ar bevañs a zo ken ker, an dilhajoù ivez
Ne c'hell ket ul labourer sevel mat e vugale

Na treuzet eo ar mor bras 'vel gwir vartoloded
Diskennet barzh en New York brasañ kêr zo war bed

Setu bremañ 'maomp digouezhet e-barzh ur vro nevez
Amañ bro an uzinioù he anv New Jersey

Ac'hanta 'c'h an da gontañ deoc'h deus an douare da vevañ
Ar feson da n'em gemer diwar an digoustañ

Bevañ 'reomp toud asamblez evel d'ar soudarded
Ren ar vuhez ar Rifein evel ma 'z omp anvet

N'hellomp ket mont d'an oteloù evit tebriñ hom frejoù
Kar petramant an arc'hant deus hon daouarn a goueio

Ni zo deut pell deus ar gêr 'vit gounit dollarioù
N'omp ket deut 'vit o'r dispign 'barzh an ostalerioù

N'omp ket deut d'an Amerik war zigarez pourmen
Nimp zo deut da labourat 'vit gounit pinijenn

Na teuit ket d'an Amerik da glask ho plijadur
Amañ 'vit gounit arc'hant e renker bezañ fur

Bezañ fur da labourat deus ar mintin tre d'an noz
Ni 'mez c'hoant kaoud a-wechoù ur momant da repoz

Kaout 'reomp bep seurt labourioù re lous ha re galet
Labourioù da skuizh ar c'horf ha yae fall d'ar yerc'hed

Tremen gant un tamm bara deus ar mintin tre d'an noz
Ha moamp ket 'vit e lonkañ 'met gwin ar baradoz

Ha c'hoazh klevan lavaret ez omp tud dirollet
Tud 'garaint ket o famil ha memes tud kollet

Ha me lâre ar c'hontrer eo an dud kalonekañ
Lâr omp deut d'an Amerik 'vit gounit peadra

Da zeskiñ mat hon bugale, reiñ d'e deskadurezh
Ha n'em sevel o-unan dimeus an dienez

'vit reiñ d'e deskadurezh vat un tammig a danvez
Ha reiñ dê kalez sikour pa'c'h efeint er vuhez

Dever an tad a familh nen eo ket ken aes se
Me ho ped an hini 'oar da lavaret din-me

Ni paotred yaouank omp amañ a vijemp dimezet
Ma vije bet an danvez 'raok oamp bet partiet

Na gant re hon mestrezed bepred ouzh hon gortoz
Goud' ma vimp distro't d'ar gêr ni ray dê o bennozh

Me ho ped paotred yaouank pere zo barzh ar vro
Da selaou gant interest lod dimeus ma c'homzoù

Ha pere zo ataked gant kleñved an dañsoù
Me ho ped da zond amañ 'pad un nebeud bloavezhioù

Me ho ped da zond amañ 'pad un nebeud bloavezhioù
Da ziskuzhañ ho tivesker dimeus an ebatoù

Ma 'n em lak 'n ho fantazi vit dont d'ar bal 'barzh in kêr
Ma n'ouzoc'h ket kaozeal angle n'ho peus netra d'ober

Ha neuze 'zistroin d'ar gêr evel chas divouetet
En em louzo ban o c'hambred 'n ur soñjal 'n o mestrez

Peshini zo barzh in Breizh en tu all d'ar mor bras
Ha 'michañs kavin boneur 'vit dont d'he gwelet c'hoazh

Evit pas n'em zisklaeriañ ma anv 'lârin ket
Mes e larin seulamant on deus parez Speied

Ganet on 'barzh Ar Rubioù 'barzh ur gêr war 'n uhel
Dezignet da veajiñ bihanik em gawell

Dezignet da veajiñ bihanik em gawell
Ma anv e larin deoc'h me eo Yann Chiteren